

I

Me o supli Kristenian tostaet da glevet
 Kanan d'eoc'h eur ganouen zo neve composet
 War sujet eur c'hren Douar ebars an Itali
 Herves ma lar an histoar neusket pares deshi.

2

Er C'halabr ag er Sicil, Messin a Reggio
 So bed lac'het daou hant mil kousket n'ho goueleo
 A tri kant mil all blesset allas pebeus distruj
 Kenbras malheur na we gred memed gand an Diluj.

3

Er bla eis a naoutek kant er fin a vis kerdu
 An dud a gouske kontant ar mintin wa eru.
 Mes ker prompt a kuruno an douar a grenas
 Ag oll ties ar c'herio war an dud a goueas.

4

Neuze we klevet eur c'hri eus ar muian spontus
 Tout an dud o tlfuni skoet ker malevrus
 En kreis an defalijen en awel ag er glô
 Ag an tan gwal o tispén beteg ar moguerio.

5

Ar mor evel gant spouron a zouzas war adre
 Mes kerkent vel eur Leon war guer e n'em dole
 Sklepel ar Batimencho a glei kouls ag a zeo
 O kargan ar plassenno da lonkan tud en beo.

6

Kant kilometr pe ouspen en daou goste d'ar mor
 Ar heyo tout a zispén gant ar brassa fulor
 An douar so anfonset ag ar mor a veuas
 Tout ar vro zo revined gand eur malheur ken bras

7

An dud ne wainket lazet a wa skoet ken dal
 Ne wient pelec'h kuzet an noz a wa tefal
 En kreis arvglô an avel a kazi en noas pill
 E krient o klask tec'hel eus an tollo grisill.

8

An Itali zo eur vro un ar guerra er bed.
 Amzer vev a ra d'alc'hannad eur c'hlima beniguet
 Honnes eo bro ar Pablenn ag an dud discoursi
 Mes breman an tier gwalen a zo koueet warni.

9

Messin a wa eus Pors-Mor un arc'herra er bed
 Mes an Douar gand fulor a zo bed anfonset
 Ker Reggio wa ken bras mes siwas en eun tol
 En Douar ec'h enfensas ag ec'hint kollet ol.

10

Bete neuze an dud-ze a wa n'ho goueleo
 Ar mammou ar vugale partout ar famillo
 An holl a wa discoursi d'en ebet na zoete.
 Et hent tout da gompari dustu dirag Doue.

II

Mes pa wa deud an termen e krenas an Douar
 Ag ar mor tout o helpen o kreski ar glac'har
 A Mairi a zo koueet, an Ilis, ar c'hazern
 Netra neneus resisted eus karnaj an Ifern.

I2

Dorojo ar risonio tout ec'hint digored.
Pa eo lac'ked ar Mestro, ar Lerron a zo ed
Da lerez a da billan pa maint en liberte
N'o defoa den da zoujan na gendarm na Doue.

I3

Ar lerron a brofite beteg da violi
Ar merc'het c'hoas en bue ag en desped d'ho c'hri
Et trochent o bisiet dagad o goalenno
Evel monstro miliguet eus punz an Ifernio.

I4

Pa we kassed ar c'helo d'ar Roue en ker Rom
Tout an dud skuille daelo eus eur malheur ken tom
Ar Roue, ar Rouanes a zo ed n'o bete.
A pa weljont gand ankres e krijont ma Doue.

I5

Neuze dre urs ar Roue oe kassed ar c'helo
Ma vije outan true en oll nationo
Ar Frans zo bed ar guentan bro Zaos hag ar Russi
An Allmagn kals eveltan da gas sikour deszhi.

I6

Setu aze kristenien eun tamiñ abrege
Mes allas den na gompren malheurioevelse
Med Jesus en Aviel a lavar demni oll.
Kredi ennan kent mervel pe c'homp tout da goll.

I7

An douar ag an Envo a dremeno kentoc'h
Evit komzo an Otro pere a zo zuroc'h
An Eol, ar Loar, ar Stered, ar Mor a dremeno
Mes ar pez zo prometet gant Jesus a bado

I8

Levr an testamant Neve eo Levr an Aviel
Roed dimp gant ab Doue a gand e bestel
Er Levr ze man ar Grasse d'an oll dud maivrus
Ag a zigor an Envo d'an neb a gar Jesus.

I9

Prened eta ar Levr-man gred honor da Jesus
Lennet ar pez so ennan a c'houi vo evurus
Lezit tout ar waperien gant o doktrino fos
A gant Doue da vik en c'hefet dar Barados.

Au verso: Chanson an efer gouin.

I

Me o supli kristenien, en hano Jesus Crist,
Komprenit vac'hanouen, rag meurbet e heo trist,
Va zujet eo ar boesson, an alcool milliguet,
Glahar an dud a fesson, rouin ar Vretonet.

2

Setu man va histoar, eun exempl goal spontus,
Eun tad, eur mab ga e c'hoar bete neuze evrus,
Bewa rint assambles gras d'hor sobriete
Mes an diaoul a zeues da droubla an tri-ze.

3

Eur sulves, ar pod yaouank a rankontr eun otro,
Bonjour, emezan, pod koant, me o klask a bel zo,
Me meus teir gondision da rei d'ec'h-hui da choas,
Hag en aour eur million, choazit o havantañ.

4

Petra, me ar pod yaouank, a c'houllfet evit ze ?
An aotro, gant aer gontant, a guinigas neuze,
Ma keres laza da dad, pe skei e var da c'hoar,
Pe efa gouin a gouin mad, te vo pinvik dispar.

5

Oh, pebeus goul direzon, laza va sadik kes,
Pe skei va c'hoar guez mignon, m'en tou ne rin james,
Me efo gouin dre voder evit kaout he c'harc'hant,
Hag an diaoul ken zeder, a lar me zo kontant.

6

Ar paotr yaouank a redas d'ar guer de direten,
Hag evel ma tigoras, oa leun aour melen.
Kargan 'ress he modellou evit prenan ar gouin,
Hag et tremp he vuzellou, ze dennas da wal fin.

7

Breman en osteleri e kafeplijadur
Er harto, en odivi, heg er visso impur,
An tad, gant tristidigues, a lavaras d'he vab:
Va buguel, laka eves, da gundu n'eo ket mad.

8

Ar mab, vit ar vej kentan, narespontas netra,
Mes koler a wa ennan, maretern da efa,
A pa sistroas dar guer, muioc'h meo adarre,
Divergont vel lussifer e vallozi Doue.

9

Pa c'hantre en ti e dad gant eur vouez dous
An delo 'ne zaou lagad vamab, ra ket a drous,
Efet epeus adare, pebeus glac'har eo ze,
Kol da gorf ha da ine, sonj en otro Doue.

I

Neuze ar mab en koler euz rebecho ken mad.
A sko e dad ken pouner, ma lazas mik e dad.
A du rebecho e c'hoar, e sko e c'hoarik paour.
Setu aze an histoar euz ar gouin hag an aour.

II

Pa heo divevet ar mab, e galon zo montred,
Fa ouel neuz lazet et dad hag e c'hoar gues skoet,
Kemeret eo prisonier dre aret ar justis
A kondawnet ar mevier da marv er hourdassis.

I2

Laked eo er selulen dahortos ar maro,
Zonjit ennan, kristenien, penos e skuill dele

Kollet eo korf hag ine,allas dre fot ar gouin
Hag e ben a vo troc'het dindan ar vouillotin.

I3

Brema tadou ha mamou,pere sav bugale
Disket d'hei ho feddenou,roit d'hei komsou Doue
Grit d'hei lenn an Aviel,guir denzor ar furnez,
Ha guillotin Breiz-Izel na grenna den james.

I4

Ar gwin hag ar gwin ardant a goust arc'hant hag aour
Hag a rent an den mechant hag ar familhou paour,
Eun den meo a zo noazus d'he vreg d'he vugale
Hag eun den goal danjerus atao en pep contre.

I5

Evit kaout grasse Doue prenit eun Aviel,
Gant va almanak neve noufac'h ket ober wel,
Ha da vlao-nep a vevo am c'hlasko zur are,
Hag Doue e penigo c'hui hag o pugale.

F.Le Quéré.

Lannion.Imp.Henry Mauger.

Au verso:

Kren douar an Itali.